

# 10 ali gant ar CNIL evit bezañ naet war Internet


## 2 Bez doujus d'ar re all !

Kiriek out eus ar pezh a embannez. Arabat neuze skrivañ n'eus forzh petra war ar rouedadoù sokial hag ar foromoù. Atav e vez displejous d'an nen lenn gerioù drouk diwar e benn.




## 5 Gra gant meur a chomlec'h postel !

Gallout a rez implijout ur chomlec'h postel evit da vignoned hag unan all evit ar c'hoarioù hag ar rouedadoù sokial.



## 8 Diwall da c'herioù-tremen !

Arabate reiñ anezho da zen ebet. Klask ur ger-tremen luziet : arabate implijout na da zeiziad ganedigezh na da lesanv.



## 3 Arabat lavaret pep tra !

Ro an nebeutañ posupl a ditouroù diwar da benn. Arabat dit embann da soñjoù politikel pe relijiel; na skign ket da niverenn bellgomz.



## 6 Diwall da fotoioù ha da videoioù !

Arabate embann fotoioù a lakfe ac'hanout diaes, pe a lakfe diaes da vignoned. Ur wech skignet war Internet ne c'helli ket mestroniañ netra ken.



## 9 Gwelloc'h dit naetaat da rolloù-istor !

Diverk ingal rolloù al lec'hiennoù bet gwelet ganit. Ma implijez un urzhiataer ha n'eo ket dit, gra gant ar merdeñ prevez.

## 1 Gra mat da soñj a-raok embann !

War Internet e c'hall an holl gwelet ar pezh a lakez enlinenn : titouroù, skeudennoù...



## 4 Gwarez da gontoù !

Gwelloc'h eo parametriñ mat da brofiloù war ar rouedadoù sokial evit mestroniañ an titouroù a fell dit diskouez d'ar re all.



## 7 Implij ul lesanv !

Evel-se e vi anavezet gant da familh ha da vignoned hepken.



## 10 Diwall da roudoù !

Klask ingal da anv war ul lusker-enklask evit gwelet peseurt titouroù a gaver diwar da benn war Internet.

